

ANTRETIEN ETRE DAOU ZEN YAOUANC VAR EUR SEPARATION VOLONTER

Var eun ton nevez

Selaouit oll tud yaouanc, eur reson familier,
A henou eur et speret isel zo o chomen Treguer,
Hac en deus ar volonte da zont da zisclerian
An tenor deus an amitie zo arruet gantan.

Crenvoc'h cals eguet ar mor, primoc'h eguet an avel,
Brillantoc'h eguet an tan, douçoc'h eguet ar mel,
Eo chaden an amitie, pa ve parfaitamant
Hac unisset a galon entre daou den yaouanc.

Rre se ta, goaset yaouanc pere a ren er bed,
Ne lakit ket o speret da re garout merc'hed ;
Rac gout ouson ar feçon da douch ar c'halonnou
Mui eguet an doctoret gant o oll discoursiou.

Eun temperament douç o devez ar merc'hed,
Gant eur galon goal fragil, eun humor imparfet ;
O bisach a zo joaüs, ho daoulagat mignon,
Me o c'halon zo traitour ebars e pep feçon.

Me meus choaset eur vestres, ar vrava femelen
A guement zo er c'hanton, nemet ma zeo bien ;
E merit, e zalanchou a zepant eus an ee,
Mes n'hellan mui e meuli ; ar gloar so da Zoue.

O lumier an divalijen ! da hano eo al Loar,
Te form ar blanedennou e ren var an douar,
Hac ec'h eus va oblijet dre va flaneden galet
Da zisober eur serman pehini am boa gret.

Me a ya da ziscleria eur separation,
Goude cals a garante etre daou guir vignon ;
Ar femelen oblijet da zont da chench quartier,
Hac ar mal zoken dalc'het na ell ket a ober.

Cetu ta ar femelen leset en abandon ;
A remplisset e c'hallon a zesolation,
E rencout n'en separi demeus e c'harante,
Model deus e flijadur, tensor e amitie.

Allas ! eme'r femelen, me a vel brema scler
Ne meus ken var an douar netra ne me miser,
Me na meus na tad na mam o ren var an douar.
Ha muia tra am chagrin, na meus den ac am c'har.

Oll lapousset eue an er, canit tout assembles
Gant eur music elocant, vit ma clevin o moues,
Ma ellin demeus ho pers caout consolation.
Pa zon gant va servicher leset en abandon.

Sant Per, prinç an Ebestel a porsier var an trôn,
Diskennet em c'habinet, roit din consolation,
Pe suppliit an ancou ma teuyo kent an heur,
D'am lemel deus ar bed-ma pa ne meus nemet maleur.

Pa voa'r femelen yaouanc en en desolation
Ec'h antren n'e c'habinet ganti e guir vignon ;
En eur dont d'e zaludi en deus bet goulendet
Petra es eo sujet ma zeo ket contristet.

Ar Plac'h

Me ren dech eur reveranç vel eun Æl eus an eë,
E ma etro ho taouarn chaden va liberte ;
Hanval ous eur martolod trapet etre daou dour,
He ne zeus nemet Doue a ell rei desan sicour.

Ar Goas

E pes feçon Plac'h yaouanc, em be me an alc'hoë
A guement a ranferme chaden o liberte ?
Rac ne ma ket em pouvoar, pa n'er meritan ket ;
Besa an dispansatour Rouanes ar merc'hed.

Ar Plac'h

Oh ! escusit, den yaouanc, rac n'on ket eun objet
A diefe beso hanvet Rouanes ar merc'hed ;
Evit besa caret dre eur guir amitie,
Ne deuit ket d'am godissa ha bet ousin true.

Ar Goas

Credit hardi, Plac'h yaouanc, en o caran parfet.
Hep imblija ar flambos gant Venus alumet ;
Kent vellech ar rivierou o pigaat d'o sources
Eguet biken, va mestres, ac'hanoc'h na drahisfen.

Ar Plac'h

Ret e zeo din finissa ha cessi barlan,
Ho consou, va mignon ker, am tent meurbet contant ;
Me deu da souheti dec'h ar bonheur parfetan ;
Eur pried d'am bolonte ho caro evel ma ran.

Ar Goas

Pa rencomp n'em separi, greomp a galon vad,
Kercouls eo ober abred evel a ziveat.
Pa n'em domp ket destinet da vesa priejou,
Chanç domp ebars er bed-ma a goude hor maro.

Ar Plac'h

Me c'hoar ganen vel Adam barados terrestr,
Pa voe difennet ountan dibri froues gand e Vestr,
Pa zigresq va liberte e cresq va entêtamant ;
Rel eo en em separi bout bepret et contant.

Ar Goas

Felix, Hector ha Pompe, Abeillard ac Anton,
Ar patriach Abraham ac ar fur Salomon,
En nobstant d'oll oll skient o deus renket finissa,
Ha ni dle besa contant d'ober ar memes tra.

Nep en deus gret ar zon-ma a zo c'hoas den yaouanc
Oajet a dri uguenimis en tu-hont da dri-c'hant
Hac en deus-hi composet en desolation,
Touchant eo ar c'halonnou piket gant Cupidon.

KER IS, AR ROUE GRALON

HAG ILIZ MIRAKULUS ANN ITRON VARIA RUMENGOL

« Na be bed Gwerc'hez Remengol

« Biviken ne deia da gol... »

En Escopti Kerne el lec'h et ma breman môr Douarnenez, e oa guechall eur gear vras meurbet hanvet Is.

Eur voguer leden hag huel, gant seljou houarn, he diffenne deus ar môr. Er gear-ze ne velet, o toues ann dud pinvidic, nemet disurs, goall exempl ha fallagries. Gralon, pehini a chome neuse er gaer a Is, a oa Roue Breis-Izel. Bet eoa breseller en he yaouankis, ha rust enn andreed he zujidi ; mes enn he gosni, selerijennet dre ar feis cristen, e teuas da vesa dous evel eun oan. Hirvoudi ar re alies war d'isursou Is, ha war ar vue dirollet a rêne be werc'h, ar Brinees-Ahes, gant an noblans yaouanc a gear a deus ar vro hanvet hirio Kear-Abès, pehini a oa dezhi a leve.

Enn amser-ze, ive, e oa e Breis-Izel, daou abostol santel, daou vignon da Zoue. Sant Caourintin, kenta Escop a Guimper, ha Sant-Guenole (1), kenta abad a Landevennec ; alies o devoa preseguet ar feis e gear a Is, ha gourdrouset ar Roue Gralon, abalamour d'an droug oberou, d'an torfejou ha d'an injustisou a ree bemdes, e pales e verc'h yaouanc ; mes goab a ree anheso, hag ar Roue, simpleet dree anno ad n'en devoa mui a c'halloud avoalc'h, evit arreti disursou ker bras.

Doze seuisas er fiin o velei Is caledet en e fec'hejou, hag a roas da anaout da Æl Breis-Izel he vignon Guenole, penos eb dale pell, ar gear gaer-ze a vije beuset gont ar môr. Kerbent, Guenole a pignas var he vare'h hag a redas da gear Is, o sonjal c'hoas mouga coler Doue. Mes tremenet e oa an amser a drues. Pa em em gavas en Abat santel var dro anter-nos, seljou Is a oa digor, ag ar môr a grose spontus, o tirual var an dud, an tier ag ar palesio. Guenole ne allas savetei nemet Gralon ebken ; guelec a rer c'hoas rondou treid ar marc'h er garec var pehini, abaoue, abaded Landevennec, arog comer o c'harg, a deu da ober ho feden a da anaout ar Roue Gralon evit fondatour, eur c'houent.

Abès mere'h fall ar Roue, kiriec, a revin Is oê troet e *Marie Morgan*, anter maoues hag an-er pesk. Par bar arl oar, he c'hlever c'hoas alies o bana, var mor Douarnenez, a eus reveniou, ar gar veset. He daoulagat a zo evel diou stereden, he bleo evel ann aour, e gousoug ha he diou vronn ken gwen ag ann ere'h, ag e voues meliodus a laca da gousec dre e c'halmiou; evelse, martolodet ar vro, ractal ma he c'hlevont, a lavar etres-ho, gant spouront : Tec'homp. Abès a zo savet deus e fales, ar gwel amser ne ma ket pell, a ma taleomp e vesimp tolet cousket var ar rec hier.

Evel Sodom, Gomor, a Babylon, Kear Is ne m'a mui ; ag irio ar mor a ruill dreist he fenn.

Da-zao eol, Galon a vesa pignet gant Guenole var lein Menes-Hom a daolas ac'hano eur zell truesus var e lerc'h ; mes e lec'h ma edo ar gear Is, ne velas mui nemet môr Douarnenez, ag e couesas d'an daoulin evit trugarecat Doue ag ar Verc'hes da vesa saveteet e vues.

Pa zavar divar he zaoulin, e velas dindan ann eol, o luguec'ni, *Ru-men-Goulou* pe *Men-ru-ar-Goulou*, var pehini vijet sacrificet tud e beo, a bep mis, eur buguel bihan, c'hoas eus ar vronn. Neuse, beuset enn e zaelou, ag a zaoulagad savet e tresec en Enn, e lavararas d'he vignon santel.

« War ar Men-ru-Zont, consacret da eun Doue barbar, me a rei sevel eun ilis caer d'ar Verc'hes, ag el lec'h ma scuiller goad « an dud da Dentatès, e scuillo mam ar gwir Doue e grason var Breis-Izel, »

Gralon a zalc'has mad d'her c'her, a beleien ar baiannet o vesa o en em revoltet pa veljont dispen templ an Doue faos teutates, ar Roue cristen o zebas e kever Argol e penn ar Vretonnet convertisset.

Goude besa great e beden, var Menes-Hom, ar Roue Gralon a heuilhas Guenole da abatti Landevennec savet gant-an, eun nerbeut blavesiou kenoc'h. Diarag kement-se en devoa c'hoas roet e bales, e Quemper, da Sant Caourintin, pehini e devoa torret enaon dezhan a de gompagnunes gand eun tam deus e besk bian. E plas ar palès-se e ma breman ilis caer catredal Quemper.

Gralon a dremenas e Landevennec a rest eus e vues eun eur binijen galet, ag alies e care mont gant e vignon ker da Rumengol da bedi evit ne bobl, an *Itron-Varia-Rumed-Oll*, besa eun devoa an eur d'he guelec brudet hras e pevar c'horn Breis-Izel ag o vervel etre divrec'h sant Guenole, e Landevennec, e recommande e ene da Zoue onn eur lavaret gant fisians.

Itron-Varia Remengol.

Miril ouzin na zin da goll,

Pensec cant vloas a zo abaoue ma e maro Gralon, ag ar Vretonet, pere zo bepret tud a feis ag a galon, o deus c'hoas sonj eus ho roue cos hag eus e vignon, Sant Guenole. Mes ma c'hanafevent gwelloc'h histor ho bro gaer, pa zeont dazul an drindet da bardon bras Rumengol, ha pa velont môr Douarnenez, Menes-Hom, Landevennec a tour huel ilis miraculus ann *Itron-Varia-Remed-Oll*, a lavarfont ann daelou eun ho daoulagat, eun eur vale gant respect var donar ar Zent hag ar Rouaned.

Braz ar burzudou a zo bet

Ebars ann amzer dremenet !...

Bras ive ar bursudou a ro c'hoas crio, ann *Itron-Varia Rumengol*, enn andret ar Vretonnet, ha drest-oll, enn andret ar be-lerinet a deu bemde de gwele, alies eus a bel evo, ha cals anes ho diarc'hen ag e corf ho rouchoudou.

Ar vinoret dileset, an intanveset paour, ar beorien noas, soudarded Breis-Izel, e creis tan ar brezel, ar vartolodet var ar mor bras e furol ann oll dud affiget a gorf, a galon ag a speret, daru en ho foaniou, daru eun dangerriou, dar all en disesper, ha darn ive, var gwele ar maro, o deus sonjet eus ho Mamm dous a mad, hag alies e leveron dez-hi gant garante ha gant tiance enn he gallond hag enn he madelez.

O Gwerc'hes sakr Remengol, Patrones Breis-Izel

Pedit evidomp, hirio ha pa rankimp mervel :

Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonnet

Ho deus ho karet, ho kar ho karo bepret.

(1) *Gwen-oll-e, Oll-e-Gwen*, il est tout blanc hanvel evel-ze gant he vamm ar santez Ven, abalamour ma oa eur buguel koant a fur, Sant-Gwnole, dre he vertuziou, en deuz meritet an hano kear Æl Breiz-Izel, l'ange de Bretagne.

G W E R Z

Ar Roue Gralon ha kear Is

War don : *Judik hag Holofernes* ; pe war don : *Bosen Elliant*

I

Petra 'zo e kear Is,
Ma ze ken foll ar yaouankis ?
M'ar clevan-me ar biniou,
Ar vombard ag an delennou ?

N'eus e-kear Is netra neve,
Ann ebattou ma 've bemde,
N'eus e kear Is nemet tra ou cos
Ann ebattou ma 've bemnos.

Bojennou dres so diouannet
A dor an ilisou prennet
Ha wa ar beorien o vela
Ec'h hisser ar chas d'ho drailla.

D'ha c'hoesec-va an oll verc'het
N'ho deus Doue, met ar pec'het
Ha da ober e gurunen,
E roont o c'haera rosen.

Ahès, merc'h ar Roue Gralon,
Tan an ifern en e c'halon,
Er pen kenta deus an dirol,
A gas d'he c'heul ar gear da goll.

Sant Guenole, gant calonad,
Zo bet m'eur vec'h e caout e zad,
Ha gant daelou an den Doue,
En deus lavaret d'ar Roue :

— « Gralon, Gralon, lake eves
« D'an disursou a ren Ahès,
« Rag tremenet vo an amser
« He scuillo Doue he goler.

« El lec'h ma voa c'hoarsadec ken
« E vo neuse scrignadec dent,
« El lec'h ma voa canaouennou,
« E vo neuse scrijadennou !... »

Ag ar Roue cos spourounet,
He verc'h en eves kelennet ;
Mes discaret dre ar gosni,
N'eus mui an ners da stourm outi

Ha, scuiss gant rebechou e zad,
Evit mont deus e zaoulagad,
Hi deus gret gant droug-sperejou,
Eur pales caër tost d'ar sclujou.

Eno, gant e amourouchen,
E ma fennos an obaden,
Eno, en aour ag er perles,
Evel an heol e par Ahès...

II

— « Plijadur dec'h er pales-man,
« Merc'hed gentil a potred scan,
« Plijadur dec'h a nosves gren.
« Eme eur prins en eur antreen.

Ar prins a sougue dillad ru,
He varo e voa hir a du,
Ag e izili a verve,
Ag e zaoulagad a zeve.

— « Ra viot deut mad, estranjour,
« Eme Ahès gant eur beg flour ;
« Ia, ra viot deut da gwela,
« Mac'h n'hanveit an traou falla.

— Neuse m'en bot digemer mad,
« A respontas an divroad :
« Rag me er fall so ken disket
« Ag an hini neus em crouet !

A kerken Ahès d'er pedi,
Da ober eun dro zans gant'hi,
Ag an oll a eneb Doue,
Gwassa ma c'hallent a droc.

Pa voa d'an obadesen-se fin,
Danser Ahès, er eur c'hoarsin,
Ag en eur sevel he zioa scoa,
A lavaras : — « Nouzoc'h netra !...

« Kerc'hit din-me deus ar gear Is,
« Verseillou santel an ilis
« Kerc'hit croas ar c'hrussufiet
« Eun hosti sacr, ag e velfet !

Ahès a respontas timad :
— « Cavet vint en llis va zad,
« Rag va zad diot-me a gred
« En trompler-ze a Nazareth !...

Tri a redas e ber amser,
Ag a ziscaras an Aoter,
Ag an traou sacr e ve douguet
Etre e daouarn milliguet,

Ar prins ru, ractal m'ho guelas,
A greis e galon a c'hoarsas,
Ag a lavaras c'hoà enn-han :
— « Plijadur dec'h er palès-man !

Da guenta a doliou houtou,
E vrujunas ar veisseillou,
Goude flastras ar grussifi,
Ag e crenchas var an hosti !...

A war-n'he, gant oll e noas,
En eur gana. — « Mallos d'ar groas !
E ras es eis stum dishenvel,
Dansou ar seis pec'het marvel !

Kerkent ar pales a grenas,
Ag ar c'hurunou a stracas,
Ag a dreus o zellou nec'het,
E scoas tan glas al luc'hed,

— « Na c'houi'vel, eme ar Prins ru
« Me laca Doue var e du... »
Ma lavarent oll gant glac'har,
— « Ahès e deus cavet e far !...

III

Pa voa fin d'ar sacrilejou,
Messenger an droug sperejou
Chomet e eunan er palès,
A dosteas da gaout Ahès.

— « Va dousic coant merc'h da Gralon
« Ha muia caret va c'halon,
« Ha n'elfent me ket eneb gis
« Guelet alc'houe sclujou ker Is.

— « Va zad a zoug enn he guerc'hen
« An alc'houe aour deus eur chaden
« Ha va zad breman zo cousket,
« Ha caout an alc'houe n'allan ket

Mes hen d'he zraid enn eun strincas
Ha d'he dornic flour a bocas,
Ag e dallas dre e zellou,
Karget a dan ag a zaélou.

IV

Heb goud ar pes a dremene,
Neuse eur pennad ac'hane,
En e bales ar Roue cos,
E voa cousket e creis an nos.

Cambr paour Gralon ne voa enn-hi
Netra nemet eur grussifi
Deuet a zorn eur mignon ker,
Sant Caourintin, Escop Quemper.

Netranemet eun Aviel,
Roët gant eun den zantel,
Roët des-han gant Guenole,
Evel eur merk a garante.

Kaër en e gosni vel eun .El,
E cousket Roue Breis-Izel,
Ag enn dro de dall, e vleio gwen,
A re, dispac, eur gurunen.

Neuse, Ahès, ar brinces fall,
Evel pa vije scoet dall,
En e gambr, heb aon rag Doue,
A deu da laeras an alc'houe.

En eur vale war beg e zroad,
Ar verc'h a dosta scan de zad,
A goustadic deus e guerc'hen,
A den neur c'hoarsin, ar chaden.

V

Piou a deu du-hont gant ar ru,
Pignet var eun hincane du,
Ag hen dan daoulam var er gein
Ken a strink an tan deus ar vein ?

Hennes eo messenger Doue,
Digasset en Is d'ar Roue
Ennes eo Abostol ar feiz,
Sant Guenole caret e Breiz.

Tostat'ra en eur c'haloupad
En he zorn den e vas abad,
Ag eur stol aour var e zaë ven.
Ag eur c'helc'h tan en dro d'heben.

Setu hen e dor ar pales
E p'hini e cousk tad Ahès
Diwar e varc'h an den santel
A c'halv, en nos Roue Breis-Izel

— « Gralon, Gralon, sao heb dale,
« Sao evit heuilla Guenole,
« Sao evit tec'hel deus ar mor,
« Sciujou kear Is a zo digor ! »

Ag ar Roue cos trubullet,
E mes 'vele zo zaillet.
— « Din-me, din-me, va mac'h prima
« Siouas peurgollet ar guer-ma !... »

Ha var e varc'h e ber amser
E kers da heul e vignon ker,
Ha var o lec'h, en eur hiudal,
E clefont ar môr o ruial.

Neuse ar brinces dirollet,
He amoureux gant-hi collet,
Dre gear Is, ha glei ag a zeo,
A rede, dispaket e bleo.

Pa glevas daou lamp ar c'hesec
Araog ar môr e tiredec
Dre al luc'het gant nec'hamant,
Hanveas e zad ag ar zant.

— « Va zad ! va zad ! mar em c'harit,
« War o marc'h scan va c'homerit »
Ag e respont, an tad tener
A zao e verc'h var an tailler.

Kerken ar môr a vuanna,
A Guenole en eur grenn
A gri : « Gralon, töl an diacul-se
« Divar dailler da hincane !... »

Couscoude c'has leun a aneres,
An tad a zalc'h ar bec'heres
Ees ar zant a ra zio ar groas
Ag a stoc outi pen e vas.

Kerkent, mestres an droug speret
A ruil er môr bras fuloret,
Ag e cleo tost ar Roue cos
Eur c'hoarsin skilfr e creis an nos.

Mes, rented scanvoc'h eb dale
E sail prim da c'heul Guenole,
Ag e varc'h, gieb e beder c'har,
A lamp deus ar môr en douar.

Breman, ed e Mari Morgan
Ahès deus sceud al loar a gân,
A gân ag en eur vouse'hoarsin,
A grib er môr he bleo besin.

VI

Da zao heol ar zant a Gralon,
A bigne var lein Mene-Hom,
P'hini, e dreit ebars en tres,
Zao e ben var Douarnenez.

Ac'hane Roue Breis-Izel,
War e lec'h a dolas eur zel ;
Mes, el lec'h Is, gant e deg dor,
Ne velas mui nemet ar môr.

— « Eur gear em boa deus ar gaëra,
— « Ha setu hi et da netra !... »
Ag e galon oll a fraillas,
Ag e zaoulagad a velas.

— Gralon, Gralon, 'me Guenole,
— Gralon, d'an daoulin ganen-me
A Gralon dindan e c'hlaç'har,
A goë d'an daoulin d'an douar.

Ag eno, dispac e vleo gwen,
Ag e dal pleget er boultren
E lavare c'hoas ar Roue :
— Ra vo gret bolonte Doue !...

Pa zavas diwar e zaoulin,
Dindan tan flamm heol ar mintin.
A velas a dreus e zaëlou
E luguerni *Ru-Men-Goulou*.

War ar men-ze, hon tadou cos,
A scuill goad d'eun Doue fos,
Ag ar Roue. e ber amser,
A lavaras d'he vignon ker :

— « Du-hont, e memor ar gear Is,
« Me zavo d'ar feis eun Ilis,
Rag evit testeni d'an oll
M'he galvo ilis Remengol. (1)

« Rag var dolen ru Deutalès
« Me lakai da ren ar Verc'hes,
« Ha beb bloas, en enor d'ar groas
« E rin ober eur pardon bras.

« Eno, an oll du a siget,
« A gava d'ho foanniou remed,
« A silvidigues d'ho ene
« Dre c'hras Mari gwir vamm Doue

« Pa vo an Doueou maro,
« Ha coet meur a goat dero,
« Eun de deus ar pevar avel,
« E teuo d'hi bobl Breis-Izel.

Neuse ma ve sonj a Gralon,
E vo lavaret a galon :
— « Brassa bursudou a so bed
« Ebars en amser dremenet.

(1) Remengol, hanvet gwechal *Ru-Men-Goulou*, da lavaret e *Men-Ru-ar-Goulou*, abalamour ma voa eno eur men ru, enn templ consacret da c'houlou de, enoret evel eun Doue, Dindan an hano a Deutalès, Doue-Tad, ar Roue Gralon goude hesa discaret an templ-se, he savet en e blas eun illis caër da Vam ar gwir Doue, c'henchas hano payen *Ru-Men-Goulou*, en hano christen a *Remengol*, da lavaret e *Remed-Oll* deus a behini ar batrones a zo hanveet an *Itron-Varia-Remed-Oll*, (Notre-Dame de tout remède), abalamour d'ar burzudou bras a ra bemdes eno ar Verc'hes, abaoue amzer ar Roue Gralon betec irio.

En zo c'hoas induljansou a re vrassa roet gant on Tad santel ar Pab dan oll gristenien a deu da Remengol de bedi a galon, Patrones-Breis-Izel. Dre eur skrit Apostolic roet e Rom, en Illis Sant-Per, kement beleg a lavar an ofera var an aoter-vras an Itron-Varia-Remengol, a den a boanniou ar purgator en ene p'hini a ia ractal d'ar barados.

An dregont a vis mae 1858, an Itron-Varia-Remengol a zo bed curunet gant eur gurunen aour a perles, roet des-hi gant hon Tad Santel ar Pab Pii nao. Remengol a zo bet, a viscoas ar gaëra ag ar santela illis a Vreis-Izel, enoro a rer en-hi darn eus ar groas ag ar gurunen spern J.-Ch. darn eus a relegou ar Were'hes, Santes Anna, Sant Joseph, an Ebestel an doctoret eus an Ilis, Sant Breis-Izel a relegou ouc'h pen daou vil sant all : herves an dud cos peb gwir Vreton a gle, eur vec'h da viana. *beo pe varo* ober pelerinach Remengol.

PEDEN AR ROUE GRALON

D'an Itron Varia Remengol

Itron-Varia-Remengol
Mirit ouzimp na zaimp da goll ;
Pedit ive ho mab Jesus,
Ma vezimp gant-han evurus.

Itron-Varia-Remengol,
C'hui eo rouanes ar bed oll,
Bezit hor mamm, hor Batrones,
Ha ni ho meulo da james.